

AU CŒUR DE L'EMPLOI

UL LEGUMAJEREZEH SOKIAL ER C'HASTELLIGOÙ

Bep sizhun, e takad ar C'hastelligoù e Ploufragan, e vez un dek bennak a c'hopridi hag a c'hopradezed o tiveskañ, o naetaat hag o troc'hañ legumajoù roet evit netra hag o pakata anezhe hep aer. Oberoù al legumajerezh, a oa bet lañset gant an embregerezh sokial Au cœur de l'emploi e miz Even 2025, zo en o barr.

Ploufragan, bali ar C'hastelligoù, niv. 24. Ur Gwener a viz Even emamp, ha gouestlet e vo ar beurevezh-mañ d'ar brikoli. Pemp den bep a da-vañjer wenn gante zo o labourat e salioù ostilhet mat ha sklaerijennet evel zo dleet. N'eus den ebet oc'h ober strapenn pe o terriñ e benn. Pep hini anezhe a oar mat ar pezh en deus d'ober. Dominique hag Isabelle zo karget da bouezañ al legumaj, da sac'hañ anezhe ha da dikedenniñ. Er bazenn diwezhañ emañ Damien oc'h ober ul labour ken pizh all : serriñ ar sac'hadoù brikoli hep aer a-raok kas anezhe etrezek ur skornerez ma vint gourskornet da -18°C. Karr-samm ar Sikour pobl a dre-meno dilun da gemer ar sac'hadoù 500 g evit reiñ anezhe d'ar dud ezhommek. Ar mod efedus-se da labourat ac'h a mat en-dro deiz-ha-deiz. Cheñch a ra al legumaj diouzh ar mareoù-bloaz. Tomatez-kerez, patatez, karotez, togoù-touseg, ognon. Ouzhpenn bloaz zo e oa bet staget ganti ha plijout a ra d'an dud. Oberoù al legumajerezh, un embregerezh gant ar pal implijout (EPI) bet lañset e miz Even 2025 gant Au cœur de l'emploi, zo en o barr. Al legumaj krai produet a re pe n'int ket bet gwerzhet gant ar broduerien e korn-bro Sant-Brieg a vez degaset di en ur mod digoust gant kenstroll ar c'hevredigezhioù skoazell evit ar boued en Aodoù-an-Arvor*, anvet Coasalim 22.

Ar brikoli,
ur wech
divesket,
gwalc'het ha
troc'het, a
vez pouezet
ha sac'het
dre 500 g
gant gopridi
ha gopra-
dezed al le-
gumajerezh
Au cœur de
l'emploi.



DR

Ur wech ma zo bet graet war-o-zro el labourva treuzfurmiñ int prest da vezañ debret. 100 kg a vez produet bemdez, muipe-vui. Ar plusk a vez kaset d'ur feurm e Pleneventer, da vezañ troet e biogaz e-barzh ur metanaer.

BEZAÑ GWEVN HAG EN EM REIZHAÑ

Ar c'henstroll-se, krouet tri bloaz zo ha harpet gant ar C'huzul-departamant, a ro nerzh evit lakaat digreskiñ an dismantr boued, krouiñ implijoù ha kas boued mat, eus ar vro hag evit netra, d'an dud a zo er vec'h. Emañ an atalier legumajerezh war an hent-se da vat. Anne-Marie ar Bras zo e penn ur skipailh daouzek goprad hag a labour eus al Lun d'ar Gwener. Sternerez e oa bet er pretioù stroll e-pad 28 vloaz e melestradurezh publik an ospitalioù ha bremañ emañ en he bleud : « *En em santout a ran kalz gwelloc'h er sistem-mañ. Bezañ gwevn hag en em reizhañ, setu hon gerioù pennañ. Soñjal a reomp e-barzh an dud, gant empatiezh ha madelezh. Hag en em zihuziañ a reomp kalzig ivez!* » Ar genskoazell eo, evel ma lavar Anne-Marie, ac'h a d'ober sichenn ar sistem-se. An dud-se, ec'h eo bet merket o zreuz er vuhez gant ar reuzioù, tud erru bresk hag en digenvez war marc'had al labour, ac'h a da welet Au cœur de l'emploi evit kavout labour

koulz ha doujañs. N'eus ket ezhomm da gaout un diplom pe da vezañ prenet skiant en a-raok. N'eus nemet un dra : bezañ o chom e-barzh an « takad hep den dilabour war hir dermen » a zo etre Kêriadoù hag ar C'hastelligoù.

ER WASK GANT AR BERZH

An embregerezh sokial-se, a oa bet lañset e 2023, zo 47 goprad ha gopradez ennañ hiziv an deiz. Evel Camille. An den-se eus ar Reünion eo an hini koshañ e skipailh al legumajerezh hag ur « Yann mil micher » eo hag a zo bet o labourat a-youl-vat e-pad daou vloaz a-raok sinañ ur gevrat didermen he fad (KDP). Prenet en deus skiant tamm-ha-tamm war kement atalier a zo e-barzh an embregerezh : liorzhañ, naetaat ar c'hirri, bitellat ha gwriat. « *An daeoù a blij din!* » emezañ, en un taol c'hoarzh da zegas c'hoarzhadeg, hag eñ oc'h ober e bennad hent diwezhañ a-raok mont war e leve.

Al legumajerezh testeniet bio zo er wask diwar ober berzh betek re, e-barzh lojeiz re strizh gant re nebeut a ostilhoù, ha ne zeu bet a-benn d'ober war-dro ar goulenn ac'h a war greskiñ. « *Ma c'hallfemp gwennañ al legumaj, da skouer, e talc'hfent gant o liv hag o tekstur kentañ* » a lavar Anne-Marie ar Bras. « *Faotañ a rafe deomp kinnig boestioù-mir gant soubenn, ratatouilh ha koñfiz berjinez.* » ●

* Bank ar boued, ar Groaz Ruz, ar Sikour pobl ha Pretioù ar Galon.

« EMPATIEZH HA MADELEZH »